

**Dizano. Chañson ar big.** Bet savet e fin an XIX<sup>ved</sup> kantved.  
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

## Chañson ar big

*War eun ton añsien<sup>1</sup>.*

Dimezelled an Aotrou Tangi  
O-devoa diou Big en o zi ;  
Desket o-devoa de' parlant,  
Evid o divertisamant.  
Da vourk Plouyann e yeent da bourmen,  
Da weled o amezeien.

Ar Big kenta euz aneze  
A yee euz eil ti d'egile<sup>2</sup>,  
E leh ma sante c'hwez ar hrampouez :  
Hag e houlenne eun tammig  
Da zoulaji he halonig.

Allaz ! dre walleur ez eo bet eet  
Da di Janed an Avelet,  
Evid goulenn eun tamm krampouez,  
Hag ivez eur bannahig lêz ;  
Mez an dirantez-se krueel  
He lazaz gand eun taol spanell.

Moñstr ! da galon ne fraille ket  
Gand an druez euz he hleved  
O krial diwar-bouez he fenn :  
« Va buhez din, Aveledenn ;  
Mar dout fachet, ne deuin mui  
Da glask krampouez na yod d'az ti. »

An dirantez n'e' ket bet kontantet  
O veza bet ar Big lazet ;  
Kemennet he-deus da vab Grall  
E rankje ober kemend-all,  
E rankje ober evelti  
Da big all an Aotrou Tangi.

Yann an Hena 'n hini a zoñje  
E oas-te fur beteg neuze ;  
Pa'z-poa-te greet eur belevad<sup>3</sup>

---

<sup>1</sup> añsien : koz.

<sup>2</sup> euz eil ti d'egile : euz an eil ti d'egile.

Az-poa keillet<sup>4</sup> ar skudell goad,  
Az-poa-te keillet en ti-forn :  
Chañs vad on-eus diwar da zorn.

---

<sup>3</sup> eur belevad : ?

<sup>4</sup> keillet : ?